

An daouzegved taol

Eun abadenn evid noz Nedeleg

(Noz teñval. Trouz eur harr braz o storloka en eun hent don).

Tomaz an Du

Hey, marh gwenn! Daoust ha n'out ket gouest da vond buannoh war an hent? Bez' e rankin teurel ar skourjez war da grohenn! Gagn! Setu aze eur marh hag a vefe mad da gas eur horv maro d'ar vered ma vefe bet eur marh du. Med gwenn eo. Hast 'ta! Netra d'ober gantañ! Eun devez penn-da-benn n'eo ket re dezañ evid ober eul leo. Eur holl arhant! Ne honez ket e gerh! Hag eur holl amzer. Koulz e vefe bet din bale d'ar gêr war droad. Boulhurun! Hey 'ta! Gwir eo, n'ema ket mui e-touez ar re yaouanka. Med me a zo kosoh egetañ, koulskoude, hag e ran c'hoaz labour eun devezour mad. Gouzoud a ran ivez, eur marh hag eun den n'eo ket ar memez tra. Eun den a zo lakeet izelloh eged eur marh war an douar. N'eus forz! Hey!

Pa zoñjan er vizer am-eus gouzañvet me e-pad va zammig buhez! Breva va horv o labourad, bara du da zebri hag eun dornad truillou d'en em wis-ka! Netra ken. Talvezoud a ra ar boan. Eun tiad bugale hag a zo atao unan pe zaou taget gand eur hleñved bennag p'emaint bihan, ha p'int deut braz, ale! setu emaint tehet pep hini war e du ha ne jom ket den ebed da zikour ar re goz. Hirio an deiz, ar wreg paour eo eet fall he divesker hag al labour a zo din d'ober penn-da-benn, koulz lava-red. Ar marh griz a zo eet kozig, n'am-eus ket peadra da brena eur marh yaouank, ha kouls-koude eo red din arad an douar ha lakaad an traou da drei ma fell din kaoud boued din ha d'ar vamm. Nann, an den paour en-deus kalz re a drubuill war an douar. Hey 'ta, ruzer brein! O! O! diwall 'ta! Piou eo hemañ?

An den ruz

O! *(Herzel a ra ar marh)*. O! salud deoh, den mad. Bez' e hellfeh sevel ahanon en ho karr evid mond betek ar vourh? Skuiz-maro on, ne welan beradenn ebed, hag ouspenn ne anavezan ket mad ar vro. Mar plij ganeoh!

Tomaz an Du

Piou oh-hu? Diskouezit din ho fri, da genta. Ne garan ket sevel n'eus forz piou em harr. Beb seurt tud a zo en heñchou da noz. Tostait deuz al letern, ma vo gwelet peseurt tres a zo warnoh.

An den ruz

Tres eun den paour hag a zo o tond deuz a bell. Arabad kaoud aon dirazon. N'am-eus lazet na laeret den ebed, evid c'hoaz.

(C'hoarzin a ra; eur hoar zadenn skiltruz).

Tomaz an Du

Hum! N'am-eus gwelet ahanoh biskoaz.

An den ruz

Lavaret am-eus deoh emeon o tond deuz a bell.

Tomaz an Du

Deuz peleh?

An den ruz

En tu all da Bariz.

Tomaz an Du

Koulskoude a zo brezoneg mad ganeoh.

An den ruz

Va mamm-goz a zo ganet e Breiz hag he-deus desket din.

Tomaz an Du

Hag en tu all da Bariz ema ar hiz da zougen baro ruz?

An den ruz

Ma baro a zo ruz, ruz, petra rin? Ma vefent bet glaz, am-befe douget anezo kenkoulz.
(*C'hoarzin a ra*).

Tomaz an Du

Gwir eo! Pignit er harr!
(*An den a bign er harr ha kuit ar marh*).

Tomaz an Du

Hey 'ta! Ne ya ket buan ar harr, ma den, med douget oh, d'an nebeuta. Azezit war ar zah, amañ. Êsoh e vo deoh.

An den ruz

N'on ket boazet da veza azezet. Mad emañ em zav.

Tomaz an Du

E-giz ma karit. Hey, marh gwenn!

An den ruz

Koz eo eet ho marh, 'm-eus aon.

Tomaz an Du

Ya, feiz. Gwelloc'h e vefe eun all egetañ. Med ar peb gwella a ra diouer din.

An den ruz

An arhant?

Tomaz an Du

Evel just! En tu all da Bariz e kaver marteze kezeg da brena gand avalou brein? Lavarit din e peleh ha me a yelo dioustu.

An den ruz

Ne lavaran ket. Med amañ, er vro, a zo arhant hag aour d'ober teil, me oar mad.

Tomaz an Du

Arhant hag aour d'ober teil! Arsa, ma den ruz, c'hwi a zo kouezet nevez 'zo deuz al loar! Rouez eo an arhant amañ, ha red eo labourad stard evid chom beo. Evid an aour, n'am-eus gwelet biskoaz e liou. Lavaret a zo bet din eo melen, med marteze eo gevier.

An den ruz

Koulskoude, me a zo deut amañ da garga eur zahad.

Tomaz an Du

Da gar... da garga eur zahad! O! O! C'hwi a zo klañv-fall, den baro ruz! Faoutet ho-peus ho penn en eur goueza war eur mên bennag, kazi zur. Eur zahad aour! A! A! A! Evid farsal eo, n'eo ket?

An den ruz

N'am-eus ket desket farsal. Eur zahad aour on deut da gerhad. Gouzoud a ran peleh ema ar bern. Ha n'ema ket pell ahann.

Tomaz an Du

N'ema ket pell ahann an aour? Siwaz deoh, den paour, an aotrou Doue, meulet ra vezo, a vennigo ahanoh, rag ho spered a zo eet da fall.

An den ruz

Na lavarit ket an ano-ze, mar plij!

Tomaz an Du

Peseurt ano? An aotrou Doue! Ha perag 'ta? Me a zo kristen mad. O! O! Marh gwenn! Petra hoar-vez gand al loen-mañ? Sell 'ta! Eun den all a zo e-kreiz an hent. Boulien, en noz-mañ a zo kalz tud o vale war ar mêz. O! ma den, c'hwi a garfe pignad er harr ivez, kazi zur, hañ? Savit e-barz, memes-tra! Eun den muihoh pe nebeutoh, n'eo netra. Ar marh gwenn a yelo war e bouezig, ha setu! Tostait! O! O! Pegen treud 'ta! Liou ar maro a zo warnoh, siwaz! Roit din ho torn da zevel er harr!

An den gwenn

Bennoz Doue warnoh, Tomaz an Du!

Tomaz an Du

Penaoz? C'hwi a anavez ma ano?

An den gwenn

Me a zo eur paour-kêz klasker-bara, Tomaz, hag eur wech ar mare e teuan dre amañ da houlen an aluzenn gand an dud vad.

Tomaz an Du

A ya! Sell! Gouzoud mad a ran am-eus gwelet ahanoh c'hoaz. Ha n'eo ket eur wech, med aliez, ya, aliez. Pignit er harr, mar plij ganeoh, ha me a gaso ahanoh beteg ar vourh da glask lojeiz. Ma ne gavit ket, c'hwi a deuio beteg ma zi. Me a renko deoh eur gwele plouz fresk er hreñch e-kichenn an diou vuoh. N'eus netra gwelloh eged al loened evid derhel tomm d'an dud.

An den gwenn

Trugarez deoh, Tomaz, med n'ez an ket war an tu-ze. Pez a houlenfen diganeoh eo ober din eun tamm bara, rag naon du am-eus ha n'on ket gouest da vond pelloh heb kaoud eun dra bennag da zebri.

An den ruz

Na gollit ket ho amzer gand eur foeter-hent e-giz hemañ, Tomaz. Ar glaskerien-vara-ze, ma rafeh dezo ar pezh a houlennot, a dennfe diga-neoh beteg ho roched. Ma vefe red gouzoud mad, marteze eo pinvidikoh egedoh. Leuskit hemañ da vond gand e hent hag eom d'ar gêr!

Tomaz an Du

Opala! piou eo ar mestr amañ? Da biou eo ar marh hag ar harr? Me a ra ar pezh a garan, c'hwi a glev mad? A-viskoaz am-eus greet an aluzenn d'ar beorien, hervez ma galloud. Hemañ en-deus naon, ha greet e vo dezañ da zebri. Gortozit, breurig paour! N'eus ket kalz a dra ganin, evid din dond d'ar gêr euz ar foar, rag paourig a-walh on. Koulskoude, prenet am-eus daou lur bara dous evid an hini goz a zo chomet er gêr. An hanter a vo evidoh, sellit! Hag an Aotrou Doue a ziwallo ahanoh!

An den gwenn

Trugarez braz, Tomaz an Du. An hini a zo ganet en noz-mañ a rento deoh kant kwech al lur bara-mañ.

Tomaz an Du

An hini a zo ganet en noz-mañ? Boulien, e peleh ema ma fenn ganin? Ya, hirio ema Nedeleg. Noz Nedeleg a zo warnom. Bevet ar mabig Jezuz!

An den ruz

Randonerez ha sotoniou! Koñchennou mamm-goz!

Tomaz an Du

A! A! A! C'hwi, an den baro ruz, hañ, peoh gand ho teod divalo, mar plij. Petramant me a daolo ahanoh er-mêz deuz ar harr ha c'hwi a raio an hent war ho krabanou e-giz eun touseg. Penaoz 'ta! Hemañ a zo divergont 'vad!

An den gwenn

Kenavo, Tomaz an Du. Mond a ran gand ma hent bremañ. Ni en em welo c'hoaz, a-barz pell.

Tomaz an Du

Kenavo, ma breurig paour! Ha ma tigouez ganeoh tremen dirag an ti, du-mañ, deuit hardiz e-barz. Emichañs e vo eur begad bennag d'ober deoh, ma chom yah Tomaz koz. Hey! marh gwenn! Hastom, hastom!

An den ruz

Ta! ta! ta!, Tomaz, c'hwi ne viot ket pinvidig birviken.

Tomaz an Du

Ha neuze 'ta! Red eo beza pinvidig war an douar-mañ? Boulien hurun! Hey, marh gwenn, pe me welo.

An den ruz

Tomaz an Du, me oar mad ho-peus mil boan paea ho Kouel-Mikêl.

Tomaz an Du

Gwir eo. N'eo ket êz a-wechou, nann. Hey!

An den ruz

Pe oad ho-peus, Tomaz?

Tomaz an Du

Seiz ha tri-ugent. Perag?

An den ruz

Eur bloavez bennag c'hoaz, Tomaz, hag e viot re goz da labourad. Piou a raio boued deoh ha d'an hini goz paour, ne hell ket fiñval na dorn na pao?

Tomaz an Du

Gortozit, ma den, n'on ket eet da fall c'hoaz. Hey 'ta! loen vil!

An den ruz

Perag ne deufeh ket ganin, Tomaz, da zamma eur pochadig aour? Gand eur pochadig aour e hellfeh beva brao-tre ho-taou beteg ar maro, dine-het broust. Daou bichon!

Tomaz an Du

Ha da beleh ez eer da glask eur pochadig aour, mar plij, den ruz e benn faoutet? Me ne fell ket din kemer eur spillenn ha n'eo ket bet gonezet ganin. La!

An den ruz

Ne lavaran ket deoh kemer madou ar re all. An aour emañ o vond da glask n'eo da zen nemed d'an hini a gemero anezañ.

Tomaz an Du

Ahanta! Poent eo kas ahanoh d'an opsital, ma breurig paour. Hey!

An den ruz

Selaouit, Tomaz! Anaoud a rit Gwaremm ar Peulvan?

Tomaz an Du

Gwaremm ar Peulvan? Emei dirazom. Daou hant paz c'hoaz hag emañ erru enni. Ha petra gand Gwaremm ar Peulvan? Penaoz e anavezit-c'hwi Gwaremm ar Peulvan?

An den ruz

E Gwaremm ar Peulvan ez eus eur mell mên savet en e zav, n'eus ket?

Tomaz an Du

Feiz sur! Ar mên-ze 'ni eo ar peulvan!

An den ruz

Selaouit, Tomaz, selaouit mad! Dindan ar mên-ze ez eus eur zal vraz. Pemp kant troatad hed.

Tomaz an Du

A!A! A! Koñchennou mamm-goz! Mad d'ar vugale vihan staget deuz ar vronn!

An den ruz

M'hen asur deoh...

Tomaz an Du

Ta! ta! ta! Me a zo deut re goz, siwaz, evid kredi koñchennou. Evid o honta d'ar vugale vihan, ne lavaran ket. C'hwi a zo o klask leunia din ma fenn gand gevier da lakaad ahanon marteze da doulla dindan ar peulvan. Me n'on ket sotoh eged eun all, ma den. Brao e vefe gweled Tomaz koz o tilezel e labour evid turia an douar e Gwaremm ar Peulvan. Neuze e teufe tud en-dro dezañ. Ha pa vefe goulennet digantañ : « Ahanta, Tomaz koz, peseurt labour an diaoul emañ oh ober aze? Oh ober hent d'ar gozed?» Tomaz koz a respontfe : «Me a zo o tizoloi eur zal dindandouar, dezi pemp kant troatad hed, ha leun-tenn a zahadou aour.» Neuze e vefe c'hoarzedeg tro-war-dro. Me a garfe ober an taol, den ruz, rag plijadur am-befe ober plijadur d'ar re all. Med n'am-eus ket amzer. Hey! hey! d'ar gêr, marh gwenn? A! A! A!

An den ruz

Selaouit, Tomaz an Du! C'hwi n'ho-po ket da duria douar eun disterra. Eur wech ar bloaz, klevit mad, eur wech ar bloaz, da zevez an Nedeleg, da hanter-noz, an douar a zigor dirag ar peulvan ha pep hini a hell diskenn er zal vraz da garga e zah gand arhant ha gand aour.

Tomaz an Du

Ahanta, n'eo ket gwir. Nann, nann, n'eo ket gwir. Hey!

An den ruz

Gwelet e vo bremaig. Erru eo tost an hanternoz hag hirio ema an Nedeleg. Evid petra on deut amañ, Tomaz, deuz ken pell, ma n'eo ket gwir pezh a lavar. Konta gevier d'ar re all a zo brao, med peogwir me ma-unan a ziskeno er zal dindan an douar, sur a-walh e ouzon penaoz ema an traou.

Tomaz an Du

Hag ar zal a zo leun a arhant hag a aour?

An den ruz

Leun tenn!

Tomaz an Du

Bremañ n'ouzon mad perag n'am-eus gwelet biskoaz pez aour ebed. Med penaoz ar gurun eo en em gavet an aour-ze dindan ar peulvan?

An den ruz

N'ouzon ket re vad. Kuzet eo bet, kazi zur, da vare ar brezelioù braz gand mistri ar vro. Pell 'zo! pell 'zo! Hag evid ober da houzoud e peleh eo bet kuzet, a zo bet savet warnañ eur mên hir.

Tomaz an Du

Seiz kant karrellig! Neuze dindan peb mên hir ez eus eur bern aour?

An den ruz

Marteze zo, marteze n'eus ket. Med dindan Gwaremm ar Peulvan a zo aour a-garradou. Ma mamm-goz he-deus gwelet an toull digor.

Tomaz an Du

A ya! Ha perag, neuze, ho mamm-goz n'he-deus ket karget eur zahad aour? C'hwi a vefe pinvidig-mor bremañ.

An den ruz

Selaouit c'hoaz. An toull a zigor eur wech ar bloaz, da Nedeleg hanternoz, etre an taol kenta ha daouzegved taol kleier an overenn-nnoz. Ne bad ket pell. Skoet an daouzegved taol, an douar a zeu en-dro. Ma mamm-goz he-doa pevar-ugent vloaz pa dremene dirag ar peulvan dres d'ar mare ma oa digor an toull. Diskenn a reas er zal, med, dre ma vale goustadig gand he divesker fall, ne gredas ket hi chom re bell en toull gand aon da veza paket e-barz. Setu ne gemeras nemed an amzer da deurel he dorn en eur zah da gemer eun dornad aour. Sell, Tomaz, amañ ganin a zo eur pez aour deuz zal ar peulvan.

Tomaz an Du

Eur pez aour! Eur pez aour! Gwir eo? Hennez a lintr koulz hag an heol e-kreiz an eost. Eur pez aour! Me a wel eur pez aour! Hastom, hastom buan gand aon e vim paket war-lerh! Hey! hey! hey 'ta!

An den ruz

Kredi a rit ahanon bremañ, Tomaz an Du?

Tomaz an Du

Kredi a ran. Hastom! Sahadou aour! Sahadou aour! Me a breno eur marh yaouank hag eur harr nevez, daou, tri marh, pemp pe hweh. Hag a zavo eun ti nevez. Nann, me a breno Maner Keribil-beuz. Me a yelo da chom da Bariz e-touez ar pen-nou-braz hag a gemero pemp mevel warn-ugent... Me... Nann! Me a guzo an aour e-tal ma zi, me a glozo an aour ha ne zispignin gwenneg ebed. hastom!

(Ar marh o trotal). Hey! hey 'ta! hey!

An den ruz

O! Emaom erru, Tomaz. Diskennom! Deut eo ar mare. Ha diwall mad, hañ! D'an taol kenta, e-barz! Hag a-raog an daouzegved taol, er-mêz! A-hend-all, echu deoh!

Tomaz an Du

Klevet am-eus. Ema ma zah ganin. Me a gargo anezañ kant kwech buannoh eged p'emaon o tastum avalou-douar, hellit ma hredi...

An den ruz

Bezit war evez!
(*An taol kenta. Eun trouz spontuz*).

Tomaz an Du

Setu ema digor an toull! E-barz, baro ruz, e-barz!

An den ruz

Staget ho-peus ar marh?

Tomaz an Du

Ar marh a yelo gand an diaoul, ma fell dezañ! E-barz!

An den ruz

(*C'hoarzedeg*). Ar marh a yelo gand an diaoul... hag e vestr ivez.

Tomaz an Du

Peseurt sal vraz! Ken braz hag eun dousenn ilizou.
(*An eil taol*).

Gweled a ran ar zahadou! Leun-tenn. Din an aour. Kargom! A, ayou! ma horv! Me zo eun den pinvidig da virviken. La! la! Ema leun ar zah ganin. Ha c'hwi, baro ruz, ne gemerit netra?

An den ruz

Nann. Me a ya pelloh. Ar brasa peziou aour a zo er penn all d'ar zal. Ar re-mañ a zo peziou bihan.
(*An trede taol*).

Tomaz an Du

Peziou bihan! Opala! Me n'on ket falloh ege-doh. Me n'am-eus ket ezomm euz peziou bihan, nann. Diskarom ar re-mañ hag eom pelloh. Buan!

An den ruz

Sellit, Tomaz! Amañ ema ar peziou braz.

Tomaz an Du

O! a yaou! ma bouzellou kig-sall. Kargom ar zah!

An den ruz

Gwelloh e vefe deoh, Tomaz... (*Ar pevare taol*), karga da genta ho chakotou . Kement-se muih ho-po.

Tomaz

Ar gwir a zo ganeoh, baro ruz. Kargom! Pegement a aour! Penaoz e hellin konta ar peziou-ze gand an nebeud a zeskadurez am-eus? An hini goz, pa welo ar bern aour, a varvo war an taol.
(*Ar pemved taol*).

Gwell a ze! Eur wech maro an hini goz, me hello kemer eur vaouez yaouank hag euz eur ouenn uhel. Kargom! Ema hanter-leun ar zah ganin. Hag ho hini, baro ruz?

An den ruz

Me am-eus amzer. Dalh mad!

(Ar c'hwehved taol).

Tomaz an Du

Sikourit ahanon da zamma ma zahad, baro ruz! Roit din eun taol dorn, mar plij.

An den ruz

N'am-eus ket amzer, Tomaz. Me am-eus ma zah da garga c'hoaz.

Tomaz an Du

(Ober a ra beh gwella ma hell). Ah! Pegen ponner eo an aour brein-ze! Ah! M'am-befe bet tregont pe zaou-ugent vloaz!

(Ar zeizved taol).

Koulskoude ne fell ket din diskarga eun hanter deuz an aour. An aour-mañ a zo din, beteg ar pez diweza. Nann, ne ziskargin ket eur pez, eun hanter-pezh, netra. Ah! Spontuz eo, ma nerz a zo eet da netra. Me ho ped, baro ruz, sikourit ahanon!

An den ruz

Pep hini evitañ e-unan, Tomaz. Me am-eus a-walh gand ma zah.

(An eizved taol).

Tomaz an Du

Seiz kant kurun an diaoul! Ah! An aour a zo din-me. Ne zispegin ket dioutañ. Netra! Pa rank-fen pega ar zah gand ma dent! Ah! Baro ruz, Baro ruz, sikourit ahanon ha me a raio deoh... eur pez aour.

An den ruz

(A hoarz). Amañ a zo aour d'ober teil.

(An naved taol).

Tomaz an Du

Ah! Dond a rin a-benn. Ema din. Ruzet am-eus anezañ eun disterra.

An den ruz

Tomaz an Du, emaoh din.

Tomaz an Du

Emaon deoh? Petra....

An den ruz

Emaoh din, ya. Emaoh paket en toull. A! A! A!

(An degved taol).

Deg taol a zo sonet, Tomaz, hag emaoh er penn traoñ d'ar zal. N'ho-po ket amzer da vond er-mêz, na gand ar zah na dizah, rag kement a zo ganeoh en ho tillad ha dindan ho roched ma ne helloh ket en em stleja. Paket oh diwezad, Tomaz!

Tomaz an Du

An diaoul!

An den ruz

An diaoul, ya, Paolig a Gerzatan e-unan. A! A! A!

(An unnegved taol).

Tomaz an Du

Ma Doue! Kollet eo ma ene ganin! Paket on amañ, en douarenn-mañ, e stad a behed marvel.

Goude beza labouret e-pad ma buhez e-kreiz ar baourentez, am-eus en em leusket da goueza etre daouarn an diaoul evid netra. Evid an aour brein en-deus lakeet ahanon da goll ma fenn... ha ma ene beo... hag ar beurbadelez santel. Ha kement-se a zo erru ganin dres d'an noz benniget m'eo ganet ar Zalver. Med penaoz... an daouzegved taol ne zon ket. Petra eo ar sklerijenn-mañ? N'eo ket an aour a lintr e-giz-se. Piou a zo o tond aze? Ar paour-kêz klasker-bara am-eus greet dezañ eun tamm bara dous...

An den gwenn

Savit en ho sav, Tomaz an Du, ha roit din ho torn. Ni! a yelo on-daou er-mêz deuz an toull-mañ, hag an daouzegved taol ne zono ket a-raog ma vim erru er-mêz. Arabad kaoud aon hag ara-bad kaoud mez. An droug-spered a zo kreñv hag an den paour a zo tener dirag ar pehejou. Med c'hwi, Tomaz an Du, ho-peus greet an aluzenn din e-pad an noz santel m'eo ganet ar Mabig Jezuz. Hogen, ar pez a zo greet d'ar paour e ano an aotrou Doue...

Tomaz an Du

Bremañ ouzon piou oh. En iliz parrez, staget war ar groaz...

An den gwenn

Na lavarit da zen ebed, Tomaz. Kement-mañ a dle chom etrezom on-daou.

Tomaz an Du

Hag an aour milliget, ma Zalver?

An den gwenn

N'eus nemed mein ganeoh, Tomaz paour. Kenavo er Baradoz.

(An daouzegved taol. An diaoul a leusk eur youhadenn spontuz. Eur hantik Nedeleg).

Nedeleg 1952.